

non signalée dans Ollivier

# CHANSON AN AMITIE

COMPOSET GANT EUR MARTOLOD YAOUANK

VAR DON : *Tad ar sperejou mad.*

Tud yaouank a Vreiz-izel, pere roul yaouankis,  
En trezoc'h kernēvardet, leonis, tregoris,  
Didostañt d'ar c'haner a gan en assemble,  
A prenit oll digantan zonik an amitie.

Petra dal din chom da glask kals a droïdellou.  
Vit commanc anonei deoc'h darn va avanturiou :  
Koulz eo din lança ractal voar an occasion  
A poursuiwas ma speret da ober eur chanson.

Men zo eur c'hlaïron yaouank deus ar vortolodet,  
Rejouisset va c'halon a yeza ambarket ;  
Pen nem voelan dizourei voar bont ar batimant,  
Meus sonjet ober eur zon din a d'am mestrez koant.

Bars er bloavez mil eiz kant tri a pēvar ugent,  
D'an eiz de a vis ebrel, vit rei deoc'h da entent,  
E m'oame kuitad pors Brest, gant eur galon gontant,  
Vit mont d'ober eur c'hampagn d'ar guer a Lorient.

Pa voame o lavigat voar goure ar mor don,  
Teue ar muia zouch din em mestrez ma c'halon,  
Pec'hini a zo breman contristet bras neurbet  
O c'hortos ma delivrans, ma vefomp unisset.

Pa voame en Plouigno, d'an oad a bemzec vloa  
Men moa choazet vit mestrez eur fleuren ar gaëra ;  
Eur feumeulen goant meurbet ar pez neus ket nemeur ;  
Divar borp Plouëgat-Guërant, deus a gommun Lanmeur.

la onnez zo eur fleuren demeus ar re vrava,  
Taillet gant dorn an natur bars en e voul gaëra :

## — II —

Ag an den yaouank fragil a remerk anezi,  
Deu e galon da drital, e lagat da virvi ;

Flamijen an amitie ve gueld en e zellou,  
Eur c'hoerz dous, perpetuel ve voar e muzellou ;  
Voar e aer ëo dessinet imach an honestis,  
Voar e zal guen a skeduz, triumph ar yaouankis.

Meus ket a dalam avoalc'h vit e'hellout explika,  
Ar charmou deus recevet digant mest ar bed ma.  
Red a vefe din caout eur vouez meulodiuz,  
Vit depeigni eur guenet ker kaer, ker radiuz !

Kenta m'oe ar c'hrae kaer d'admira e guenet,  
Voa bars en eunn assemble, gand e c'hinintervezet :  
la enno e m'oa tanvet, assure e c'hellan,  
Bonhour an amouroustet evit ar voech kentan.

Ne neus ket a sperejou, assur, voar ar bed man,  
A guement a ve kapabl da c'hellout explika  
Gant petore plijadur ag a gontantamant,  
E passeis anamzer en kever va dous koant.

Dre eur vouez douc, agreabl, dre gomjou placet mad,  
Eo e devoa, gant joa vras, accordet va mennad.  
En eur mor a blijadur, en eur mor a zouster,  
E m'oamp on daou passeet, en deiz-se, on a amzer ?

Dre imagination, men sonje goeld patant,  
Ar princ Mercur entrezomp gand eur chaden arc'hant  
Damari or c'halono, voa dija unisset,  
Gant roue ar messajer, tad an amouroustet.

D'ar poent, ma pikez, veld-se em an amour va c'halon,  
Evoa en Zant-Yan-ar-Biz, da zevez ar pardon,  
la enno nim m'oamp formet chaden an amitie,  
A doujomp da zerc'hel ferm ed an eternite.

En devez voar lerc'h vintin, me moa occasion  
Da contempli adare, va dous koant Jeann-Yvon :  
Gant he c'hamaladez, gant eur galon gontant,  
Ma redas dont da gac neud, dezi da vourg Garland.

## — III —

Goude beza bed leinet ossamblez en deiz-ze,  
 A doublet ar or c'harante ag or fidelite,  
 E c'hiz gant plijadur vras de c'hondui d'ar guer  
 Ervez an uzajou kaer ve ganemb er c'hartier.

An amitie en trezomp, a dalek ann deiz-ze,  
 Zo bed en em dalc'het ferm betek goel malarje.  
 En deiz-ze va mestresik en lec'h dont da G'harlant,  
 Veld a voamp n'em brometet, c'heas da Plouégat-Guérant.

Mes eur zadornvez goude, voar bavé Montroulez,  
 Gant eun tol dre an azard, men rarkont va mestrez,  
 Ma saludis anezi, gant guir humilite,  
 Dre gomjou an tenera demeus an amitie.

Arok en em separi, m'oa touchet e c'halon,  
 Laket dei en Lanlaia eun assimation,  
 Da bec' hini ive, d'am zro, e z'on me bed manket,  
 Cetu ta em voar guementze, e z'omp en beet.

Cetu ma voa bet cessel om oll relation,  
 Ar guir amitie cheuchet en dezolation.  
 Negliget ganemp om daou memor ar yaouankiz.  
 Ken a-blijas gant Venus e zigas voar e guiz.

D'ar poent ma plijes gante om reconcilia,  
 Voa bars en eur leur nevez, en kichen Lanlaia.  
 Enno m'oamp renouvelet chaden an amitie,  
 Pec'hini n'e ket bet toret betek hirio an de.

Biskoas, aboe an deiz-se, e z'omp-ni bed manket,  
 Da vonet d'an assemble a mijemp assinet.  
 Pourmenet m'eump assamblez en oll assembleo,  
 Ag er pardonjou e ve celebret bars er vro.

Nemez pas deuis en oad da denna d'ar billet,  
 Or c'halono tenerik voa en em glac'haret ;  
 Ag o sonjal e renkchomp en em zispartia,  
 An anken enor c'halono n'oa ramplacet ar joa.

P'erruas an heur fatal, gant eun dorn languissant,  
 E tennis an uumero naovet ag anter kant ;  
 A c'hi pa devoa klevet maleur va numero,  
 Gant ar c'heun ag ar glac'har skuilez kalz a zero.

Konduet gant va gouir sort, ben eur pennad goude,  
Men em engag er marin evit pemp blo gonge;  
Cetu ma voamp pel amzer eb n'eum voelet a gren,  
Ag om n'oll relation voa gleet d'ar bluen.

Ne vankemp james beb mis d'en em gommunika,  
Dre ar post gant lizerou demeus ar re c'hirra.  
E c'homjou kaer a secret, exprimet voar baper,  
Zo ding euz meuleudi, a dalant, a zouster.

Ma mije kompietamant echuet va studi,  
E vije va brassa joa aman o raporti,  
Mes ne meus ket ar pouvoar da drei bars en rimou,  
Ar gallek en brezonek, veld a rē Prosper Proux.

Pa me eur bermission evit monet d'ar guer,  
Me mal da vont de guelet, a va c'halon zeder;  
Mes pas deu an devez d'en em zispartia,  
Et teu d'am c'honduid'ar gar en eur voela !

— « Na voel ket va mestrez ker, dont a rañs an de  
« Ma vefomp rekompancet deus or fidélité. »  
— « Né ket ze a ra din goela, kredit va zervicher ;  
« Mes eur mortolot a ve exposet d'an danjer. »

Arça eta mignonet, finissa ran va zon,  
Rag e ver ouz va guervel dont da zon em c'hlairon.  
P'on eru en Lorient, eo red din zervicha,  
A lezel va mestrez ker, gand ar c'heun da voela.

Ma fel deoc'h breman klévet, piou neus ar zon komposet,  
A zo eur speret dister deus ar vartolodet,  
Jean-Mari Martin, eo anvet dre e anno,  
A zo gannet a maguet en paros Plouigno :

MARTIN, JEAN-MARIE.

*Propriété de l'éditeur.*